

250
ADRIEN DE CARNÉ

Barz an Arvor



Kristen ha Breizad da viroiken

AR
YALC'HAD AOUR

C'hoari Farsus en eun Arvest

MOULET EVIT AN DREDE GWEACH



BREST

4 — Moulerez ru ar C'hastell — 4

—
1922

*Adrien de Carné
Barz an Arvor*

19

891
682

ADRIEN DE CARNÉ

Barz an Arvor



Kristen-ha Breizad da veviken

AR YALC'HAD AOUR

C'hoari Farsus en eun Arvest

MOULET EVIT AN DREDE GWEACH



BREST

4 — Moulerez ru ar C'hastell — 4

—
1922

Oberou A. de Carné, Barz an Arvor⁽¹⁾

Breiz karet, pezh-c'hoari e tri arvest.
Ar yalc'had aour, c'hoari farsus en eun arvest.
Ar mabig Jezuz, mister kristen en eun arvest.
Kristof ar C'hrenv, mister kristen en eun arvest.
An aotrou Flammig, c'hoari farsus e daou arvest.
Tarsisius, mister kristen en eun arvest.
Saig ar paotr fin, c'hoari farsus en eun arvest.
Barnedigez Doue, mister kristen en eun arvest.
Sac'h ar marichal, c'hoari farsus en eun arvest.
Judikaël, mister kristen en eun arvest.
Ar galoun vat, c'hoari plijadurus en eun arvest.
Ar c'hoz vedisin, c'hoari farsus en eun arvest.
Lilien ar Folgoat, mister kristen en eun arvest.
Ar mab foran, mister santel en eun arvest.
Fanch vras ha Fanch vihan, c'hoari farsus en eun arvest.

EVIT AR MERC'HED BIHAN


Noz nedeleg, mister kristen en eun arvest.

⁽¹⁾ Ar pesiou ma a gaver e Brest, e moulerez ru ar C'hastell, 4.



ARGUMENT

Le vieux père François a laissé tous ses biens à Claude, fils de sa sœur, et veuf avec sept enfants. Il a déshérité Gabriel, Jean et Mathieu, fils de son frère. Claude ne pouvant, avant quelques jours, venir habiter la maison dont il hérite, ses trois cousins complotent d'enlever, la nuit, le sac aux écus du vieil oncle. Mais Gabriel, dont le nez est d'un beau rouge, donne maladroitement l'éveil à Lucas, garde champêtre, chargé par la justice de surveiller les biens du défunt. Claude, prévenu, laisse venir les trois compères, et leur apparaît, déguisé en spectre de la Mort. Saisis de frayeur, ils se sauvent en tremblant tous les trois. Joyeux souper de Claude, en compagnie de ses enfants et de Lucas. Claude est chrétien; il pardonne à ses cousins. Il y a trois mille francs dans le sac aux écus. Il donnera mille francs à chacun d'eux, le jour de leur mariage, et fera ainsi du bien à ceux qui lui ont fait du mal.



C'HOARIERIEN

KLAODA

MAZE

IANN

BIEL, *e fri ruz-flamm*

An Aotrou KENKIZ, *noter.*

An Aotrou PILGOZ, *e segretour, bouzar-braz.*

LUKAZ, *gward-mesiou (garde champêtre).*

LANIG

HERRIG

LOMIG

JOPIG

KOUIG

LAOUIG

PERIG

nized Fanch.

bugale Kklaoda.

An dra ma a dremen e Breiz-Izel, tost da Lokour-
nan, en eun ti diwar ar meaz, ti Fanch koz, maro
n'eus ket pell. E kreiz, eun daol vras, eun direten
enni. Kadoriou. A zeou, eun armel serret.



KENTA DIVIZ

LUKAZ (*azezet ouc'h an daol*)

Eiz dervez, ia, eiz dervez zo, abaoe ma 'z eo eat
Fanch koz d'an Anaoun. Eun den mat, kenan! hag
oa va mignoun bras, avat. Eiz dervez, kre diaoul!
Eiz dervez tremenet aman evit netra. Ar barnar a
beoc'h eo en deus her gourc'hemennet d'in. Daoust
perak ? nemet dre zisfisians vras eus heritourien
Fanch. (*O skei war an daol*). Mes n'eo ket va micher
me, sac'h an dien, n'eo ket va micher me eo, choum
aman da zellet ouz ar c'hellien o nijal, da rei boed
d'ar vioc'h ha d'ar penmoc'hig, evel ma venn me
eur plac'h saout. Hogen ne jomo ket pell an traou
evelse, mar plij gant Doue. An aotrou Kenkiz, noter,
en deus lavaret d'in deac'h da noz, e teufe hirio
aman, da beder heur goude kreisteiz. Pemp heur
eo, va Doue. Den ebet! Ha, la la. Vad a rafe d'in
eun tamm bara da c'hortoz an aotrou Kenkiz da
zont. (*Tenna a ra eur c'hreün bara euz e c'hodell.*
Dibri a ra). Paour keaz Fanch! Paour keaz Fanch
va mignoun! (*Klevet a reer trouz er meaz*). Sell ta!
Petra zo?

II DIVIZ

LUKAZ, BIEL, MAZE, IANN (*gwela stank a reont an tri*)

MAZE

Hi hi hi! Tonton Fanch! tonton Fanch!

BIEL

Hi hi hi! breur keaz va zad!

IANN

Hi hi hi! ne welin mui anezan.

AN TRI (*a unan*)

Hi hi hi! maro, maro da viken!

*Hirvoudi ha krial a reont a unan. Goude eur pen-
nadig, an tri a ziroll da c'hoarzin hag en em
laka da gana, a unan.*

KANAOUEN

War don anavezet: *An hini goz.*

DISKAN

Er baradoz
Tonton koz,
Chom da viken
Laouen.

MAZE

Ni hon tri zo laouen ive,
Gand da zannez, gand da leve.

AN TRI

Er baradoz...

D'eomp ni ar zac'had aour melen
D'eomp an holl besiou arc'hant gwenn

AN TRI

Er baradoz...

MAZE

An contrig, pa vez maro mik,
An nized a vez pinvidik.

AN TRI

Er baradoz...

BIEL (*gand eur vouez flour*).

Deuit, merc'hed koant, en hon ti,
Mat omp, breman, da zimezi.

AN TRI

Er baradoz...

LUKAZ (*azezet atao ouc'h an daol*).

Brao, brao! Kanerien vat och, mignoured. Kana
mat a rit dirak an arc'hant en deus lezet, war e
lerc'h hoc'h contr, Doue r'hen pardouno. Ha c'houi
a gav d'eoc'h, hep mar ebet, e teuio e beadra en ho
kodell?

MAZE

Ha perak ta ne zeufe ket?

IANN

Ni zo e nized keiz.

BIEL

Bugale geiz e vreur.

LUKAZ

Mat. Taolit evez evelato; o sevel kestell el loar
emaoc'h, am eus aoun. An hini koz en deus great
eun testament, dioc'h a leverer.

IANN

Eun testament, santez Anna! Hennez ne ouie ket
skriva, tamm ebet an holl.

MAZE

E ve eun testament pe ne ve ket, n'eus fors; goap
a ran rak kementse, me.

BIEL

Ha me ive avat. Ni zo nized, ni zo heritourien.
Traou tonton Fanch a zo holl d'eomp, arc'hant hag
aour.

IANN

Dillad, arrebeuri.

MAZE

Binviachou, douarou, frouez, loened.

IANN

Ac'hanta, paotred! Furchomp e pep leac'h. Fur-
chomp en armel da genta.

LUKAZ (*o sevel*).

Ne' reot ket. Ar barner en deus va lekeat aman da deurel evez oc'h traou tonton Fanch.

MAZE

Ar barner? Piou eo an den ze? Ne ran forz anezan.

IANN

N'hor beus ket ezomm eus ar varnerien, ni.

LUKAZ

Mat. Da c'hortoz, an armel a jomo serret.

MAZE

Tra. N'hor beus ket ezomm ebet eus ar varnerien da gemeret hon traou. En em zifenn mat a raimp ouzit. Na petra ta?

IANN

Kre gward an diaoul! Te a zo paeet neuze da ober droug d'an dud vat? Abaoue peur e peus desket ar vicher vrao ze?

BIEL

Ni a zo tri aman, tri den krenv. Ha kredi a rez, marteze, e vezi treac'h d'eomp? Deus ta, Lukaz, deus ta da viret ouzomp da gemeret hon madou.

AN TRI (*a unan, o krial start, hag o c'hourdrouz Lukaz*).

Ia ta! deus da viret ouzomp da gemeret hon madou.

LUKAZ (*oc'h en em lakaat dirak an armel e gleze tennet*).

N'em eus ket aoun rak ho kriadennoù. A berz an aotrou barner emañ aman; me a jomo; soudard koz oun; ar c'henta a lakaio e zourn war an armel, va c'hleze a yelo raktal en e gof. (*Skei a reer war an nor*). Piou zo aze?

III DIVIZ

LUKAZ, IANN, MAZE, BIEL, an aotrou KENKIZ,
an aotrou PILGOZ.

KENKIZ (*er meaz eus an ti*).

Me eo, an aotrou Kenkiz, noter, va segretour ganen.

LUKAZ

Deuit ebarz, aotrounez, deuit ho taou.

KENKIZ

Roit d'eomp kadoriou, mar plij. (*Da Lukaz ha da Bilgoz*). Azevit em c'hichenn ouc'h an daol, Pilgoz a zeou, Lukaz a gleiz. Mat. (*Pilgoz a denn eus e c'hodell, hag a laka, war an daol, kalz paperiou a bep seurt*).

PILGOZ

Setu ar paperiou, aotrou Kenkiz.

KENKIZ

Mat. Piou ac'hanoc'h a zo heritour tosta an hini maro?

MAZE, BIEL, IANN (*a unan*).

Me, me, me! Aotrou.

KENKIZ

N'eus ken nemet ho tri? Klevet em eus en doa lezet Fanch, war e lerc'h, pevar niz, ha ne welan nemet tri aze; ia, avat, unan, daou, tri. (*O komz huelloc'h*). Aotrou Pilgoz, pelec'h emañ ar bevarded niz? (*Pilgoz, bouzar, ne finv ket. Kenkiz, o krial a bouez penn*): Pelec'h emañ ar bevarded niz?

PILGOZ

Krampoez gwiniz eo a c'houlennit? Mat. Mond a ran da gerc'hat. (*Sevel a ra*).

KENZIZ (o *krial*).

N'eo ket, n'eo ket; chomit aman. Ped niz... Ped niz en deus lezet Fanch war e lerc'h?

PILGOZ

Petra?

KENZIZ (o *krial*).

Ped niz, ped niz en deus lezet Fanch?

PILGOZ

C'hoant ho peus da welet ar c'hranch?

KENZIZ (d'an *dud*).

Va Doue benniget, ne c'hellan mui ober netra a vad gand an den ze, bouzar ma 'z eo evel eur pod. (O *krial*). Ped niz...

PILGOZ (o *tostaat e skouarn*).

Hein?... Ia.

KENZIZ HA LUKAZ (o *krial mat, o daou, a unan e toull e ziskouarn d'ezan*).

Ped niz en deus lezet Fanch war-e-lerc'h?

PILGOZ

Ne glevan ket ar pezh a livirit, Aotrou. (Skei a reer war an *nor*).

LUKAZ

Deuit ebarz, deuit, mar plij.

IV DIVIZ

AN HEVELEP RE, KLAODA.

KENZIZ (da *Glaoda*).

Piou oc'h?

KLAODA

Klaoda a reer ac'hanoun. Fanch oa breur va mamm geaz. An aotrou Pilgoz en deus skrivet d'in dont aman, a berz an aotrou Kenkiz.

KENZIZ

Mat eo, va faotr. Azezit aze, gand ar re all, Me a ouie mat en doa Fanch pevar niz,

KLAODA

Ia, aotrou, gwir eo.

KENZIZ (o *kemeret eur paper dirak an aotrou Pilgoz*).

Fanch en deus great eun testamant.

MAZE

Ne c'hell ket beza gwir an dra ze, aotrou. Tonton Fanch ne ouie na lenn na skriva.

KENZIZ

N'en deus ket bet ezomm da skriva. Great en deuz e destamant dirak eun noter ha daou dest. N'en divije ket gelllet ober gwelloc'h. Selaouit mat, breman. (*Lenn a ra ar paper*).

Hirio, dirazomp, an aotrou Fanch ar C'hall, daou dest gantan, en deus great e destamant, sinet ganeomp ha gand an daou dest. Va zri niz, eme Fanch, va zri niz, bugale va breur, Maze, Biel ha Iann, a zo tri c'hanfard eus ar re gaera. An dud koz evel doun, ne ouzont ket, a weachou, lenn el leoriou, mez lenn a reont mat e gweled ar c'hallounou. Maze, Biel ha Iann, n'o deus biskoaz karet nemet va gwenneien. Rei a ran, da Vaze, va c'horn butun; rei a ran da Iann, hag a zo berr-wel, va lunedou koz. Kavout a raint o daou, ar c'horn hag al lunedou e tireten va zaol. Biel, hag a zo mignoun bras d'ar gwin, e roan d'ezan eur voutaillad win ruz am eus lekeat, evitan, tost d'ar siminal adre ar c'heuneud. Gand an traou ze, va zri niz, mar sav c'hoant ganto da zimezi, a c'hello frita laou ar baourentez war billig ar garantez. Eun dra all eo, avat, a gav d'in, diwar-benn Klaoda, va fevarded niz, mab va c'hoar geaz. Hennez a zo eun den fur; eul labourer douar mat eo, eur gwir gristen; e

galoun a zo leun a zoujans Doue, leun a garantez evit an nesa. Intanv eo, seiz mab d'ezan. Rei a ran da Glaoda va zi, gand an holl draou a zo ennan, va daou bark, va bioc'hig, va fenmoc'hig, ha tri mil lur a zo kuzet en eur yalc'hig zu, en armel. Goulenn a ran start, digant Klaoda, ma vezo lavaret eun oferen evidoun-me, pep bloaz, keit ha ma vevo. Sinet eo ar skrid gand an aotrou Abgrall, noter e Lokournan, ha gand an aotrounien Marzin ha Karaez, testou.

MAZE (*kounnar ennan*).

Boed ar groug anezan! Louarn koz!

KENKIZ (*o tigeri tireten an daol*).

Setu ar c'horn hag al lunedou. (*Rei a ra da Vaze ha da Iann*).

MAZE (*o teurel ar c'horn*).

Dal! Setu da gorn louz! Kea da fumi gand an diaoul.

KENKIZ (*da Viel*).

It da gerc'hat ho poutaillad win adre ar c'heuneud.

BIEL

Nebeud a dra eo feiz! mes n'oun ket evit ober fae eus ar gwin. (*Biel a ya kuit. Dont a ra en dro dioc'htu, ar voutaill gantan*).

KENKIZ (*da Glaoda*).

Klevet hoc'h eus an testamant, Klaoda. C'houi a zo perc'henn an holl draou lezet gant Fanch war-lerc'h. C'houi a hell chom en ti ma, dioc'htu, evit mat. Gant gwir vat her groot.

KLAODA

Ho trugarekat a ran, aotrou Kenkiz, hag an Aotrou Doue ive, en deus va lekeat da zevel a baour da binvidik. Hogen gortoz a rin eun tamm.

Red eo d'in. Traou am eus da gempenn. Aman e teuin abenn daou pe dri dervez gant va seiz mab.

KENKIZ

Evel ma plijo ganeoc'h. (*Da Lukaz*). Lukaz, roit an alc'houesiou da Glaoda. (*Lukaz a ro*). Kenavezo, ha iec'het mat d'eoc'h.

KLAODA

Ha d'eoc'h. (*Kenkiz ha Pilgoz a ya kuit*).

V DIVIZ

AN HEVELEP RE, *nemet KENKIZ ha PILGOZ*.

LUKAZ

P'eo gwir ez out perc'henn holl vadou Fanch, deus ganen da welet eun tamm da zanvez, ar parkeier, ar c'hraou, ar chatal, n'eo ket ta?

KLAODA

Feiz! a galoun vat ez inn. Deomp. (*Lukaz ha Klaoda a ya kuit*).

VI DIVIZ

MAZE, BIEL, IANN (*Ec'h en em sellont an eil oc'h egile, da genta, hep lavaret ger, tenval o dremm*).

MAZE

An hini koz, en deus great goap mat ac'hanomp, lavar ta, Iann.

IANN

Ia ta. Ni a gane, eur pennadig zo:

An eontrig, pa vez maro mik

An nized a vez pinvidik!

Mat; n'omp ket pinvidik bras gand ar c'horn, al lunedou, hag ar voutaill.

MAZE

Tra; ne gredan ket, avat. Sell ta! En armel ze ez eus traouigou mat. An tri mil lur a zo kuzet

ebarz. Kousket a reont en armelig kaer ze. *Gand' eur vouez flour*: Deuit, deuit, pesiou brao, pesiou aour melen, deuit da gaout ac'hanomp. *Hejal a ra dor an armel*. Alc'houezet mat eo, mil gurun, ne finv tamm ebet.

IANN

Ha Klaoda a zo an alc'houez gantan.

(*Biel a ya pelloc'h, a zeou, hag a azez war eur gador, e voutaill gantan. Eva a ra peb en amzer*).

MAZE

Red eo d'eomp kregi en arc'hant ze, Iann; epad an noz a zeu e tistroimp da gemeret ar yalc'h. N'e peus ket klevet Klaoda o lavaret da Genkiz ne zeufe en e di, nemet abenn daou pe dri dervéz?

IANN

Klevet em eus. Mez an nor a vezo serret mat gantan, araok an noz

MAZE

Iann banezenn! Tonton Fanch en deus lavaret ez oaz berr-wel; gwir eo. N'e peus ket gwelet mat an nor. Te zo pikouz da zaoulagad. Dor an ti ze a zo koz, hanter vrein ha divarc'het. Ne vezo ezomm nemet eun taol dourn da ziskar anezi dioc'htu.

IANN (*o komz huel*).

Ha d'eomp-ni ar zac'hadig kaer; hag, evelse e vezo roet e wir da bep hini, ne ket ta? An holl draou da Glaoda! An dra ze a zo a enep gwir, sklear eo!

MAZE

Ro peoc'h ta, glabouser; tao ta! Sell! Setu Lukaz o tont en dro. Deomp kuit. E kreiz an noz e teuimp. Deus ta Biel, deus ta! (*Maze ha Iann a ya kuit*).

VII DIVIZ

BIEL, LUKAZ.

BIEL (*dam vezo, o chom aze, azezet atao, ar voutaill en e zourn*).

Ia, ia, mignoured, mond a ran war-ho-lerc'h.

LUKAZ (*d'an dud o tont ebarz hep gwelet Biel*).

Echu eo d'in chom aman da lakaat evez oc'h traou Fanch. N'eo ket re abred, a gredan. Ha breman n'em eus netra da ober nemet mont kuit buana ma c'hellin. Klaoda a zo an alc'houez gantan. Va c'hefridi a zo great ha great mat. Kena-vezo, mignoured. (*O trei kein, Lukaz a well Biel atao azezet*). Holla ta! Petra a rez te aze, da unan, war eur gador? Kea kuit.

BIEL (*azezet atao, he vouez raoulet gand ar gwin*)

Goustadik, Lukaz, goustadik. Me zo skuiz, ha me a jomo aman epad an noz.

LUKAZ

Epad an noz? Lavar ta; te a jomo aman epad an noz?

BIEL

Komz goustad, kerniel an diaoul! Me a gav gwelloc'h chom aman e leac'h mont kuit da genta, ha dont en dro goude, gand ar re all.

LUKAZ (*d'an dud*).

Sell! sell! petra a lavar al louunker ze? Lekeomp anezan da varvaillat eun tamm muioc'h; n'eo ket sklear awalc'h an abaden ze. (*Da Viel, huelloc'h*). Mat, mat! klevet a ran. Te a jomo aman da c'hortoz ar re all da zont en dro. Ar re all? Piou ar re all?

BIEL (*o sevel*).

Piou? Maze ha Iann ta! Ar re-ze a zeuio aman, an noz a zeu. Maze a zo eun den gwiziek. Hennez a oar lenn ha skriva.

LUKAZ

Ia, m'oarvat. Ha perak e teuint amian, o daou, epad an noz?

BIEL

Perak? N'ouzoun ket. Feiz! n'ouzoun tra. N'em eus klevet ger, nemet m'o deus c'hoant ar re ze da derri dor an ti. Maze en deus lavaret: Peoc'h ta! Iann banezen! An nor a zo koz, a zo brein. Ne vezo ezomm nemet eun taolig dourn da ziskar anezi. (*C'hoarzin a ra. Lukaz a ra neuz da zirolla da c'hoarzin ive*).

LUKAZ

Klevet a ran, mignounig, klevet a ran. (*O komz hueloc'h evit lakaat Biel da gaout aoun*). Kea kuit, mezvier touet, buan ha buan, ma ne fell ket d'it e lakafenn an tan en da ziadred. Er meaz! buan! (*Biel a ya kuit o reded*).

VIII DIVIZ

LUKAZ (*d'an dud*).

Tan foultr! Al labour ne ket echu ganen. An Aotrou Doue eo, me a gred, en deus lekeat ar zac'h gwin ze da ziskleria d'in an troiou fall a zo en o fenn da Iann ha da Vaze. Gortozit, va mignouned, gortozit. Me ho lakaio da c'hoarzin melen.

IX DIVIZ

LUKAZ, KLAODA

KLAODA

Gwelet em eus va danvez, Lukaz, ha va c'haloun a zo laouen, her c'hredi a c'hellez,

LUKAZ

Kredi a ran ive. Mez eun dra vras am eus da lavaret d'it, Klaoda. Red eo teurel evez muia ma c'hellimp. Biel en deus balbouzet d'in kalz a draou. Maze, epad an noz, Iann gantan, a zeuio aman,

ha mar am eus klevet mat, an daou ze ne zeuint nemet da laerez eun dra bennak.

KLAODA

Kleo ta Lukaz; bez dinec'h, C'hoant o deus va c'hendirvi da ober troiou fall d'in. Me eo a raio eur c'hoari bravoc'h d'ezo. Selaou ganen. Kea d'am zi dioc'htu. Eman va seiz mabig eno, breman, gant va zintin goz Soaz, he deus o savet o seiz evel ma vije bet mamm d'ezo. Lavaret a ri d'ezi am eus c'hoant da gaout va bugale da goania ganen em zi nevez.

LUKAZ

Klevet a ran.

KLAODA

Digas a ri en dro ar seiz ganez. Dreist pep tra, taol evez da zigas an traou a zo ezomm da goania, bara, kik ha fars, gwin, ar pezh a zo red. Koania a ri ganeomp, Lukaz, ha me a roio d'it eun digoll mat, p'eo gwir ez oun pinvidik breman. Kea buan, ha deus en dro buan.

LUKAZ

Ne rin nemet mont dont. (*Lukaz a ya kuit*).

X DIVIZ

KLAODA

Tud fall anezo. N'em bije ket kredet biken e vije bet goest va zri c'henderv d'am laerez. O fallentez poanuis d'am c'haloun! Hor Zalver benniget a c'hourc'hemenn d'eomp pardouni d'ar re all. Me a bardouno d'ezo a galoun vat. Mes rei a rin d'ezo da genta eur gentelig, eur gentel vat. Araok, keme-romp ar yalc'h en armel. Va zri mil lur a vezo kuzet evit ar gwella em godel. (*Keimeret a ra ar yalc'h en armel hag he laka en e c'hodell*). Breman ho kortoz a ran, va mignouned. (*Klevet a reer, er meaz, Lukaz hag ar seiz bugel o kerzet kaer evel soudarded*).

LUKAZ HAG AR VUGALE (*er meaz*).

Unan, daou! unan, daou! unan, daou! (*Dont a reont ebarz, an eil war-lerc'h egile, Lukaz er penn ganto. An holl a lavar atao, unan, daou, unan, daou. Pep hini a zoug eun dra bennak da goania, bara, boutaillou, kig, tracu a bep seurt*).

XI DIVIZ

KLAODA, AR VUGALE, LUKAZ.

LUKAZ (*o komz huel*).

Paouezit aze! (*An holl a jom a zav sounn*).

KLAODA (*d'e vugale*).

Deuit, va bugale geiz, deuit Lanig, Jopig, Lomig, Herrig, Kouig, Laouig ha Perig. Likit an traou war an daol.

AR VUGALE (*o krial a unan*).

Ia, va zad.

KLAODA (*o viret outo da lakaat an traou*).

Gortozit eun tamm. Ezomm hor beus eus eul leac'h bras awalc'h e kreiz an ti. Lukaz, lekeomp, hon daou, an daol en eur c'horn. (*Ober a reont*). Mat. Breman, va bugaligou, likit an traou war an daol.

AR VUGALE (*a-unan*).

Ia, va zad. (*Lakaat a reont*).

KLAODA

Selaout mat. O vont d'en em guzat er penn all d'an ti emaeomp, c'houi ha me, hep goulou. Lukaz a jomo aman, hep goulou ive, da c'hortoz ac'hanomp. N'ho pezo aoun rak netra, n'euz fors petra a welot. Eur c'hoari ne vo ken. Pa c'halvin ac'hanoc'h, dioc'htu e teuot o youc'hal bras, hag en em lekeot da zansal en eur gana ar ganaouen AN TEIR MOUALC'H. Anaout a rit mat, ket ta, ar ganaouen nevez se, AN TEIR MOUALC'H?

AR VUGALE (*a unan*).

Ia, va zad.

KLAODA

Mat. Deomp da guzat, ha na livirit ger. (*Klaoda hag e vugale a ya kuit*).

XII DIVIZ

LUKAZ (*e unan*).

C'hoarzin eun tamm a raimp, a gav d'in. Noz tenval eo. An tri ne zaleint ket d'en em gaout. Ne ouzont, tamm ebet, pe seurt tro a vezo great d'ezo aman. (*Klevet a reer trouz e kichen an nor*). Klevit! klevit! va zri labous eo a zo aze e kichenn an nor. Poent eo d'in mont d'en em guzat ive, evit rei da gredi d'ezo n'ez eus den ebet en ti. (*Lukaz a ya kuit. Maze, Biel ha Iann a zeu ebarz dioc'htu, o kerzet goustad*).

XIII DIVIZ

MAZE, BIEL, IANN.

BIEL (*o komz huel*).

Maze, mar bez arc'hant brao...

MAZE

Ro peoc'h, Iann gueuneudenn, gant da vouez krenv. Deomp d'an armel da genta. Iann, ne peus ket digaset ganez ar varrenn houarn da derri dor an armel?

IANN

Digaset em eus. Setu ar varrenn.

Maze en em laka da derri an armel. Klevet a reer eur vlejadenn spountus. Maze a jom en e za.

MAZE (*o c'hoarzin melen*).

Ha, ha, ha, ha! diot ma 'z omp, me ha c'houi ho taou. Ar vioc'h eo, a zo o vlejaj er c'hraou. Ha, ha, ha ha! Ar vioc'h eo.

BIEL HA IANN (*o c'hoarzin ive*).

Ia ta! ia ta! ha, ha, ha, ha! Ar vioc'h, ar vioc'h eo, a zo... *Klevet a reer adarre eur vlejadenn krenvoc'h. Maze a laosk ar varrenn houarn da goueza. Krena reont an tri evel deliou.*

MAZE

Ar vioc'h eo... ar vi... ar vivi... ar vi...oc'h.

Eur sklerijenn ruz tan glaou a zav a gleiz, e gweled an ti.

BIEL

Sell ta, Maze, sell ta! Petra zo, pe... pe... petra eo an tan ruz se?

IANN (*o sellet, aounik*).

Netra eo! netra. Luc'hed a ra.

MAZE

Luc'hed a liou ruz? n'em eus gwelet morse luc'hed ruz. Tan an ifern eo, am eus aoun.

BIEL (*o krena, hag o lakaat e zaouarn war e zaoulagad*).

Aï, aï Doue, aïou! tountoun Fanch, tountoun Fanch o tont eus ar vered!

XIV DIVIZ

AN HEVELEP RE, KLAODA.

Klaoda a zeu ebarz gant gorregez, eul linser wenn hag hirr en dro d'ezan, daou doull ebarz evit e zaoulagad. Dougen a ra eur falc'h en e zourn.

KLAODA

Ne ket tountoun Fanch eo a zo aze. Fanch a ziskreiz er vered, hag a jomo eno beteg ar varn ziveza. Me zo an Ankou, o tont da gerc'hat, a berz an Aotrou Doue, tri den a reer Iann, Biel ha Maze anezo.

MAZE

O Doue mat! Ni zo iac'h pesk koulskoude.

KLAODA

N'eus fors. Great eo ac'hanoc'h. Te a felle d'it laerez en armel. Kea da zigeri anezi araok mervel.

MAZE

Ne gredan ket avat.

KLAODA

Kea d'he digeri dioc'htu.

MAZE (*o tigeri*).

Ne welan ebarz nemet eul linser fresk, gwenn kann, pleget mat.

KLAODA

Kemer ha displeg anezi. Lienen ar maro eo evidoc'h ho tri.

MAZE, BIEL, IANN (*a unan*).

En han' Doue, ho pet truez ouzomp.

KLAODA

Didruez oun. En em likit ho tri, tost a dost, fri oc'h fri, an eil hag egile, al lienen war ho pennou.

BIEL

Re spountus eo an dra ze.

KLAODA (*rust e vouez*).

Hastit affo! ma ne fell ket d'eoc'h gwelet tan an ifern adarre.

MAZE, BIEL HA IANN (*a unan*).

Re... re... re spoun...re spountus eo...

KLAODA (*rust e vouez atao*).

Paotred an diaoul, c'houezit an tan adarre.

Ar sklerijen ruz tan glaou a zav adarre.

MAZE, BIEL HA IANN (*a unan*).

O la la! aïou! aïou! *Ec'h en em lekeont o zri dindan al lienen, o chom en o za, en eur grial atao aïou! aïou!*

KLAODA

Roit peoc'h! mar komzit ha mar finvit, va fale'h a gouezo warnoc'h. *Ne finvont tamm, an eil nag egile, dindan al lienen.*

Ac'hanta! deuit buan, diaoulou, korriged, teuziou, bugelien noz! deuit buan! Kanit ha dansit en dro d'ar zac'had daonet se.

Seiz mab Klaoda a zeu ebarz, o leuskel kriadennoù spountus. An holl en em laka da zansal en dro d'an tri, en eur gana.

XV DIVIZ

AN HEVELEP RE, AR VUGALE.

KANAOUEN AN TEIR MOUALC'H

War don gallek: « C'est le roi Dagobert ».

AR VUGALE

Bez' ez oa eur wezen
Gwechal, e Breiz, e ti Goulc'hen;
Eur wezen-gerez,
N'oa ket er barrez,
Eun all ker founnus
Na ken talvoudus.
Teir moualc'h a zeue, bemdez,
Da vintin, enni, da laerez.

E kreiz he skourrou huel
Klevet a read mad o c'houitell.
En eur pennadig
An tri labousig,
Laouen ha iaouank,
A zigore frank
O begou, da lounka,
Kerez eus ar re zareva.

Goulc'hennig, ar paotr fin
A lavaras: petra a rin?
N'em eus tra, nemet
Bruzun stlabezet
Hag hen a lekeaz
Gludennou. Allaz!
An teir moualc'hig paket
A oe diblunet ha rostet.

Leoniz ha Tregeriz
Ha Kerneviz ha Gwennediz,
Laerez ar re all
Zo eur vicher fall!
Bepred, abretoc'h
Pe zivezatoc'h,
Al laer a vo laeret
Hag an debrer a vo debret.

KLAODA

Awalc'h! it kuit ac'halenn, breman. It kuit.

Ar seiz mab a ya kuit o youc'hal.

XVI DIVIZ

AN HEVELEP RE (*nemet ar vugale*).

KLAODA

Ha n'oc'h ket maro c'hoaz, tud didalvez?

AN TRI (*dindan al lienen atao*).

N'omp ket, a drugarez Doue.

KLAODA

Da biou eo an arc'hant? Da biou an aour?

AN TRI

Da Glaoda.

KLAODA

Da biou an ti, ar parkeier, ar frouez?

AN TRI

Da Glaoda.

KLAODA

Da biou an dillad hag an arrebeuri?

AN TRI

Da Glaoda.

KLAODA

Da biou ar vioc'h zu?

AN TRI

Da Glaoda.

KLAODA

Da biou ar penmoc'h gwen?

AN TRI

Da Glaoda.

KLAODA

Mat. Eur pennadig zo, edoc'h o vont da laerez e zac'had liardou. Ha ma teufe Klaoda da c'houzout ho troiou fall, petra a lavarfe?

AN TRI

Truez en defe ouzomp. Hennez a zo bras e vadelez. (*Klaoda a ya kuit goustadik hep lavaret ger*).

XVII DIVIZ

MAZE, IANN, BIEL (*dindan al lienen atao hep gouzout eo eat Klaoda kuit*).

IANN

Aotrou an Ankou! (*Respount ebet*).

BIEL

Aotrou an Ankou! (*Respount ebet*).

MAZE

Aotrou an Ankou benniget! (*Respount ebet*).

BIEL (*Diskouez a ra e benn, eun tamm, a zindan al lienen, hag a zell en dro d'ezan*).

Maze! Iann! An aotrou an Ankou benniget a zo eat kuit.

XVIII DIVIZ

MAZE, IANN, BIEL, LUKAZ.

MAZE

Gwir? Mat eo avat! Deomp kuit ive, neuze, hon tri ha buan! (*An tri a ya kuit enn tu kleiz. Lukaz a zeu ebarz, hag a vir outo da vont kuit. An tri a ya kuit o redek en tu deou*).

XIX DIVIZ

LUKAZ, KLAODA.

LUKAZ

It kuit, ia, it kuit, tud digaloun. Re vat eo Klaoda, re vat evidoc'h, ia. (*Klaoda a zeu goustadik, e zillad pemdez en dro d'ezan. Chom a ra e gweled an teatr. Lukaz ne well ket anezan*). En e leac'h, me am bije skoet ganto, ia, skoet start gand an tri ribler ze. N'eus tra ebet da c'hounid o veza re vat.

KLAODA

N'emeur ket re vat evit an nesa, Lukaz. D'it e tisplegin an dra ze en eur goania. Naoun hor beus, ha poent eo dibri. Bugale, deuit buan da lakaat an daol. (*Ar vugale a zeu en eur c'hoarzin hag a laka buan an daol. An holl en em laka ouc'h taol da zibri*).

XX DIVIZ

KLAODA, LUKAZ, AR VUGALE.

PERIG

Kig mar plij, tata.

HERRIG

Bara, mar plij, tata.

LANIG, JOPIG HA LOMIG (*a unan*).

Ha d'in ive; ha d'in ive, mar plij.

LAOUIG HA KOUIG (*a unan*).

Eur banne gwin, mar plij.

KLAODA

Peoc'h, peoc'h, ho tamm ho pezo pep hini. Bezit dinec'h. (*An holl a zebr*).

LUKAZ

Ia, eur pennadig zo, edoun o lavaret d'it ez oaz re vat evit da dri c'henderv.

KLAODA

Ha me a lavar d'it, Lukaz: red eo d'eomp beza madelezes evid ar re all.

An tri ze n'eo ket ker fall o c'haloun evel ma 'z eo berr o spered. C'hoant bras o doa da gaout va gweneien. Tri mil lur am eus, ha kalz traou oc'h penn. Ar re ze a zo paour. Me zo pinvidik. Rei a rin d'ezo, Lukaz, va zri mil lur, mil lur da bep hini.

LUKAZ

Te zo foll mik, Klaoda, te a zo troet neat da spered, paour keaz!

PERRIG

Kig mar plij, tata, kig. (*Klaoda a ro*).

KLAODA

Ne ket troet va spered; tamm ebet an holl. Ober a rin an traou gant furnez. Lakaat a rin an tri mil lur ze da c'hounid evita, hag e roin an arc'hant da c'hreg pep hini anezo, deiz an eureujou.

LUKAZ

Te zo re vat; her lavaret em eus meur a weac'h.

KLAODA

N'oun ket, Lukaz. An Aotrou Doue a lavar d'eomp pardouni d'ar re all. Piou a zento outan paneved ar gwir gristenien, evel ar Vretouned?

Arabad eo, a dra zur, c'hoantaat madou an nesa, mez ar garantez kristen a c'hourc'hemenn:

OBER VAD D'AR RE O DEUZ GREAT
DROUG D'EOMP. (1)

Ar goel a zisken.

(1) *Teir bazen ar vad*, gant Klaoda AR PRAT, barz Pluenzr.